

## TEM KENTAÑ

## Mont ha dont

### ■ Programm geografiezh

#### Se déplacer

- Se déplacer au quotidien en France.
- Se déplacer au quotidien dans un autre lieu du monde.
- Se déplacer de ville en ville, en France, en Europe et dans le monde.
- Déplacement et développement durable.

**Fichenn 1** : Mont ha dont war ar pemdez

**Fichenn 2** : Mont ha dont war ar pemdez er broioù all : e Kebek

**Fichenn 3** : Mont ha dont war ar pemdez er broioù all : mont d'ar skol e Ginea

**Fichenn 4** : Mont ha dont etre kêrioù e Breizh : skouer BreizhGo

**Fichenn 5** : Mont ha dont etre kêrioù e Frañs

**Fichenn 6** : Mont d'an estrenvro

### ■ Mont en-dro pleustrek

Dafar ar skolidi : ur c'haier bras (24 x 32 cm), ur c'haier brouilhed.

Ar fichenoù a ginnig an teulioù (skeudennoù, grafikoù, kartennoù...) hag ar goulenoù hep na vefe plas evit skrivañ ar respontoù.

Pep fichenn zo da vezañ peget ouzh ur bajenn gleiz evit gallout skrivañ ar respontoù war ar bajenn zehoù a-dal dezhi. Al labour enklask a vo graet war ar c'haier brouilhed.



## Mont ha dont war ar pemdez

### Palioù danvez

Kas un enklask da benn  
Renabliñ an disoc'hoù er c'hlas  
Ober gant al lec'hiennoù *Mappy* pe *ViaMichelin*  
Klask titouroù ouzhpenn en ul lec'hienn Internet

### Palioù yezh

Kompren dre lenn, dre selaou ► kompren an urzhioù labour  
Komz gant unan bennak ► goulenn titouroù resis digant unan bennak  
Prezeg ► resteurel an titouroù bet dastumet  
Skrivañ ► skrivañ ur sintezenn eus ar pezh a zo bet desket

### Dafar

- Fichenn 1 : « **Mont ha dont war ar pemdez** »

### Mont en-dro

#### 1. Kinnig an tem

Un nebeud devezhioù a-raok stagañ gant an tem **Mont ha dont** e c'hallit kinnig anezhañ en ur implijout luc'hskeudenn an hent-tizh ha goulenn digant ar skolidi deskrivañ anezhi. Deoc'h da zibab an doare d'ober : labour hiniennel pe a-stroll da gentañ ha kaozeal gant ar c'hlasad goude-se pe ul labour a-stroll diouzhtu. Savit goulennoù ouzhpenn evit resisaat o respontoù :

Un hent eo; met peseurt doare hent : un hent-tizh (*TermOfis* : un hent-tizh « div wech div forzh (2 x 2 forzh) »; warnañ : kirri-samm ha kirri hiniennel. Titouroù ouzhpenn : emamp war an hent broadel 12 (RN12). War ur gartenn, diskouezit anezhañ.

Reiñ ar fichenn ha displegañ al labour enklask o deus d'ober evit ar prantad war-lerc'h.

#### 2. Kasomp un enklask da benn ha renablomp

##### 2.1 Renabliñ

Evit pep goulenn, renablit gant ar skolidi o respontoù. Gallout a rit lakaat ar skolidi da sevel grafikoù diwar an doareoù treuzdougen implijet pe diwar padelezh ar monedoneoù-se.

Ar goulenn d (« War kartenn hentoù pennañ Breizh, lakait e liv al lodenn eus Breizh darempredet gant ho tud evit o labour. ») a c'hall reiñ an digarez d'ober gant al lec'hiennoù *Mappy* pe *Via-Michelin* evit gwelet an niver a gilometroù a zo etre un nebeud kêrioù eus Breizh ha pegeit e pad ar veaj gant ur c'harr-tan hiniennel. Brest-Roazhon; Brest-Naoned; Sant-Brieg-Naoned; Sant-Maloù-Naoned, da skouer. Lakait war wel an disoc'hoù a bep seurt : hent erbedet pe hent berrañ.

An hedoù hag ar padelezhioù-se a c'hallo bezañ keñveriet gant ar re a glaskimp er fichenn 4 « Mont ha dont etre kêrioù e Breizh : skouer BreizhGo ».

##### 2.2 Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Diouzh al lec'h e vo disheñvel ar respontoù. Met gallout a rit lakaat war wel e rank an dud ober monedoneoù evit o labour; evit darn ez eo ul lodenn eus o labour zoken (bleinerien kirri-boutin

pe kirri-samm da skouer); an doareoù treuzdouden a bep seurt (karr-tan hiniennel; karr-boutin; bus; tren, metro, tramgarr, marc'h-houarn, war droad...); an diaezamantoù (an hentoù stanket; ar saotradur; servij treuzdouden boutin ebet pe diaes da implijout); an diskoulmoù (ar c'henweturañ; implijout an treuzdouden boutin).

### 3. Klaskomp gouzout hiroc'h

Implijet e vo ar bajenn « [Mont ha dont e kêr / Se déplacer en ville](#) » a zo e lec'hienn TES, evit respont d'ar goulennoù dindan.

#### 3.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Respontoù da skrivañ war ar c'haier brouilhed.

#### 3.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

Goulenn diganto reiñ o respontoù hag arguzenniñ diouzh an ezhomm.

Skrivet e vo ar respontoù mat er c'haier war ar bajenn a-zehoù.

##### Skeudenn : tramgarr Brest

a) Petra eo ? **Tramgarr Brest.**

b) Pelec'h e kaver an doare treuzdouden-se e Breizh ? **E Brest hag e Naoned.**

c) Penaos ez a en-dro ? **Gant tredan ez a en-dro.**

##### Luc'hskeudenn : ar metro

d) Petra eo ? **Ar metro.**

e) Pelec'h emeur ? **E Roazhon.**

f) Perak eo talvoudus an doare treuzdouden-se ? **Mont a reer buanoc'h gant ar metro eget gant ur c'harr; nebeutoc'h a girri zo er straedoù abalamour d'ar metro; un treuzdouden ekologel eo.**

g) Perak eo un treuzdouden ekologel d'ho soñj ? (Amañ e rank ar vugale en em soñjal drezo o-unan. N'emañ ket ar respont en destenn.) **Gant an tredan ez a en-dro; n'eus ket a saotradur o tont eus ar c'hirri-tan ken.**

##### Luc'hskeudenn : marc'hoù-houarn

h) Doareoù treuzdouden all zo c'hoazh e kêr ? Klask el lec'hienn a-bezh evit respont. **Ar marc'hoù-houarn (diwar ar skeudenn diskouezet); mont war droad; ar busoù (diwar testenn al lec'hienn).**

#### 3.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Amañ e vo lakaet war wel an doareoù treuzdouden e kêr dreist-holl : metro, tramgarr, bus, marc'h-houarn.

### 4. Klozañ : petra zo bet desket ?

#### 4.1. Gerioù da c'houzout (dielfennañ ar c'heriaoueg)

- ♦ Treuzdouden
- ♦ Treuzdouden boutin pe foran
- ♦ Kenweturañ...

#### 4.2. Dalc'homp soñj (sintezenn) :

Sevel ar sintezenn gant ar skolidi diwar ar poentoù pennañ bet lakaet war wel. Gallout a rit ouzhpennañ un nebeud titouroù.

Lakaet war wel e ranker sevel hentoù, parklec'hioù (kenweturañ), tiez-gar... evit ma c'hallfe an dud ober ar monedoneoù-se.

## Fichenn 2

# Mont ha dont war ar pemdez er broioù all : e Kebek

### Paliou danvez

Studial ur gartenn evit tennañ titouroù diwarni

Sellet ouzh luc'hskeudennoù evit tennañ titouroù diwarno ha sevel martezeadennoù

### Paliou yezh

Kompren dre lenn, dre selaou ► kompren an urzhioù labour

Komz gant unan bennak ► kaozeal gant ur skoliad all

Prezeg ► resteurel an titouroù bet dastumet

Skrivañ ► skrivañ ur sintezenn eus ar pezh a zo bet desket

### Dafar

- Fichenn 2 : « **Mont ha dont war ar pemdez er broioù all : e Kebek** »

### Mont en-dro

#### 1. Sellomp

Ar skolidi o do ezhomm eus :

⇒ Fichenn ar skolidi

⇒ Kartenn ar bed (kartenn er c'hlas, atlas pe Internet) evit lec'hiañ Kebek ha Kanada

⇒ Kartenn an treuzdougen e Kebek da implijout war un urzhiataer, un dablezenn pe da voullañ war ur follenn A3 evit gwelet mat pep tra. Dalc'het eo bet stumm orin ar gartenn (e galleg, yezh ofisiel Kebek)

#### 1.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Respontoù da skrivañ war ar c'haier brouilhed, pe gant ur c'hreion paper evit an titouroù da skrivañ war kartenn ar fichenn.

#### 1.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

En teuliad PDF da-heul ar fichenoù e kavoc'h kartenn an treuzdougen e Kebek. Da videobannañ eo evit ma c'hallfe ar skolidi respont d'ar goulennoù. Ar gartenn a zo war fichenn ar skolidi zo azasaet : n'eus nemet un arouez evit an holl hentoù hag ar poent evit diskouez pep kêr zo heñvel pe e vefe bras pe bihanoc'h.

Goulenn diganto reiñ o respontoù hag arguzenniñ diouzh an ezhomm.

Skrivet e vo ar respontoù mat er c'haier war ar bajenn a-zehoù.

a) Pelec'h emañ kêr Gebek ha kêr Montréal? Skrivit an anvioù-se war ar gartenn.

Kebek a vez implijet evit envel ar broviñs hag ar gêr-benn. Evit ober an diforc'h, grit gant « Kebek, e Kebek, da Gebek » evit ar broviñs ha « kêr Gebek » mod-all.

N'eus ket anv eus « rannvro » e Kanada met eus « proviñs ».

b) Pe anv he deus ar stêr vras e su proviñs Kebek? Skrivit an anv-se war ar gartenn.

« **Fleuve Saint-Laurent** » a vo kavet war ar gartenn. « **Stêr Sant-Laorañs** » a vo lakaet war ar gartenn ur wech difaziet.

c) Peseurt doareoù treuzdougen zo diskouezet war ar gartenn? **Hentoù; linennoù hent-houarn; aerborzhioù.**

Notenn : un niver bras a aerborzhioù bihanoc'h ha nijvaoù zo er vro (pikoù mouk war ar gartenn).

d) Ha da bep lec'h e Kebek e c'haller mont ganto? Displegit.

Ma sellont mat ouzh ar gartenn e welint n'eus ket a hentoù evit mont betek hanternoz Kebek.

### 1.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

War kartenn an treuzdougen e Kebek e weler hentoù evit ar c'hirri ha linennoù hent-houarn. Ne c'haller ket mont da bep lec'h dre an hentoù-se.

Da ouzhpennañ : gallout a rit lakaat braster ar vro war wel en ur geñveriañ anezhi gant pennvro Frañs (551 695 km<sup>2</sup>) pe gant Breizh, 5 departamant (34 088 km<sup>2</sup>). 1 785 km a-dreuz-kaer zo etre kêr Gebek hag Ivujivik e penn uhelañ ar vro (Brest-Roazhon : 243 km; Brest-Pariz : 594 km). Gallout a rit ivez jediñ stankted ar boblañs e proviñs Kebek a-bezh ha keñveriañ anezhi gant hini Montréal. Diwar-se e komprener ez eus ur bern tud o chom er c'hêrioù bras ha nebeut-tre e hanternoz ar vro.

## 2. Sellomp

Al luc'hskeudennoù a c'hall bezañ kinniget war un urzhiataer, un dablezenn.

### 2.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Respontoù da skrivañ war ar c'haier brouilhed, pe gant ur c'hreion paper evit an titouroù da skrivañ war kartenn ar fichenn.

### 2.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

Goulenn diganto reiñ o respontoù hag arguzenniñ diouzh an ezhomm.

Skrivet e vo ar respontoù mat er c'haier war ar bajenn a-zehoù.

a) Peseurt skoilh a c'hall diaesaat an treuzdougen e proviñs Kebek e-pad ar goañv? **Erc'h zo (luc'hskeudenn 1).**

b) Petra zo d'ober evit aesaat ar monedoneoù? **Ret eo tennañ an erc'h-se kuit gant skarzhoù-erc'h (luc'hskeudenn 1).**

Da ouzhpennañ : ret eo diskornañ an hentoù ivez. Holen pe meskajoù gant traezh a vez implijet pa vez izeloc'h an temperadur eget 15 °C dindan zero. An holon n'eo ket gwall vat evit houarn ar c'hirri pe ar pontoù pe evit an endro. Diskoulmoù nevez a glaskont lakaat e pleustr gant skolp koad.

c) Peseurt mod treuzdougen zo aes da implijout e Montréal hañv-c'hoañv? **Ar metro danzouar. Peder linenn zo. Mod-all ez eus busoù.**

d) Perak ez eus ezhomm eus listri-treizh war ar stêr Sant-Laorañs? **N'eus pont ebet ken war ar stêr ur wech kuitaet kêr Gebek. Re ledan eo ar stêr. Div eur hanter e-pad an treizh etre Baie-Comeau ha Matane, da skouer.**

e) Perak ez eus ezhomm eus kirri-nij evel re Air Inuit? **Re bell emañ ar c'hêrioù hag ar c'hêriadennoù a zo e penn uhelañ ar vro. N'eus ket a hentoù bras nag a linennoù hent-houarn evit mont di. Ne c'haller ober nemet gant ar c'hirri-nij (luc'hskeudenn 4).**

Da ouzhpennañ ma fell deoc'h : war luc'hskeudenn ar c'harr-nij e weler ez eo skrivet e galleg « Air Inuit » hag en inuktituteg ( $\Delta\delta^b\cap\mathcal{D}^c$  e yezh ar vro). An Inuitid a vev e hanternoz ar vro dreist-holl : Nunavik a vez graet eus o bro e hanternoz ar 55<sup>vet</sup> ledredenn. Ar galleg eo yezh ofisiel Kebek, met 11 pobl all zo er vro (Inuitid hag Amerindianed).

Lakait niverennoù al luc'hskeudennoù war ar gartenn evit lec'hiañ anezho. **1 ha 4 : e-kichen Montréal; 2 war ar stêr Sant-Laorañs etre Matane ha Baie-Comeau; 3 e-kichen Le Val-d'Or.**

### 2.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Dre al luc'hskeudennoù e weler e c'hall an amzer (erc'h, skorn) bezañ ur skoilh evit ar mone-doneoù pemdez; ar metro a c'hall bezañ un diskoulm e kêr Montréal; daou zoare mont-dont all a zeu war wel : al listri war ar stêr Sant-Laorañs hag ar c'hirri-nij a ya eus an eil aerborzh diabarzh d'egile.

## 3. Klozañ : petra zo bet desket?

### 3.1. Gerioù da c'houzout (dielfennañ ar c'heriaoueg)

- ♦ Treuzdouden
- ♦ Treuzdouden boutin pe foran

### 3.2. Dalc'homp soñj (sintezenn)

Sevel ar sintezenn gant ar skolidi diwar ar poentoù pennañ bet lakaet war wel. Gallout a rit ouzhpennañ un nebeud titouroù.

Er broioù estren e kaver modoù treuzdouden damheñvel ouzh re Breizh pe e Frañs : hentoù evit ar c'hirri; linennoù hent-houarn evit an trenioù; metro e Montréal; busoù ha kirri-boutin er c'hêrioù all. Stankoc'h eo an hentoù e lec'h ma vez kalz tud o chom; kalz nebeutoc'h el lec'hioù all. Diouzh braster ha stumm ar vro e ranker ober ingal gant modoù treuzdouden disheñvel : al listri-treizh (evit treuziñ ar stêr Sant-Laorañs pe mont war-zu inizi); ar c'hirri-nij, ken bras ma'z eo ar vro. Ostilhoù a ranker ober ganto diouzh an amzer a ren er vro : e Kebek, skarzhoù-erc'h.

## Fichenn 3

# Mont ha dont war ar pemdez er broioù all : mont d'ar skol e Ginea

### Paliou danvez

Implijout ur gartenn voger pe enlinenn pe c'hoazh *Google Earth* evit lec'hiañ ur vro hag ul lec'h resis eus ar vro-se

Lenn testennoù ha sellet ouzh skeudennoù evit tennañ titouroù diwarno  
Sevel un destenn diwar an titouroù dastumet

### Paliou yezh

Kompren dre lenn, dre selaou ► kompren an urzhioù labour

Komz gant unan bennak ► kaozeal gant ur skoliad all

Prezeg ► resteurel an titouroù bet dastumet

Skrivañ ► skrivañ ur sintezenn eus ar pezh a zo bet desket

### Dafar

- Fichenn 3 : « **Mont ha dont war ar pemdez er broioù all : mont d'ar skol e Ginea** »

### Mont en-dro

#### 1. Lec'hiomp

Al lodenn-se a c'hall bezañ graet buan-ha-buan gant ar c'hlasad a-bezh peotramant dre strolladoù.  
Ma rit dre strolladoù :

##### 1.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Gant un urzhiataer pe un dablezenn e rank pep skipailh lec'hiañ Ginea (Guinée pe Guinée Conakry ma labourit diwar kartennoù e galleg) war ar voul-douar ha goude-se klask « Kankalabé » evit gouzout pelec'h emañ al lodenn-se eus ar vro.

##### 1.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

Diwallit : meur a vro anvet Ginea zo er bed : Ginea pe Ginea Conakry (an hini emañ o klask); Ginea ar C'heheder; Ginea-Bissau, an teir en Afrika; Papoua Ginea-Nevez en Okeania.

E-kreiz ar vro emañ Kankalabé, 260 km diouzh kêr-benn ar vro (Conakry) a zo war bord an aod.

#### 2. Lennomp ha komprenomp

##### 2.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Respontoù da skrivañ war ar c'haier brouilhed. Titouroù zo da dennañ diwar kartenn-anv skol Séfouré hag eus tresadenn ar voul-douar.

##### 2.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

Goulenn diganto reiñ o respontoù hag arguzenniñ diouzh an ezhomm.

Skrivet e vo ar respontoù mat er c'haier war ar bajenn a-zehoù.



- a) E peseurt kevandir emañ Ginea? **En Afrika emañ Ginea.**
- b) Pet bugel zo e skol Séfouré? **235 bugel zo (kartenn-anv).**
- c) Peseurt yezh a gomz bugale korn-bro Séfouré war ar pemdez? **Ar pulareg.** (E fin ar pennad. Diwallit : meur a yezh all zo meneget e-kreiz ar pennad.)
- d) Peseurt kemm zo etre ar skolioù e Ginea hag e Breizh? **N'eus ket a skolioù-mamm pe nebeut; daou vloaz e pad ar CP.** (En eil pennad e vo titouroù ouzhpenn, met evit poent e c'hallit chom gant ar respontoù-se.)
- e) Perak e vez anv eus ar CP1 ha CP2 er gartenn-anv? **Bugale Séfouré a gomz pulareg er gêr. Ne ouzont ket kalz a c'halleg pa'n em gavont er skol. Abalamour da se o deus ezhomm eus muioc'h a amzer evit deskiñ galleg ha lenn war un dro.**
- f) Ha merzhet ho peus un dra bennak war al luc'hskeudenn? **Gwisket eo an holl vugale er memes doare (dilhad kaki evit ar baotred; saeoù glas ha gwenn pe ruz ha gwenn evit ar merc'hed).**
- g) Petra emañ ar skolidi o teskiñ (sellit ouzh al luc'hskeudenn)? (Luc'hskeudenn da greskiñ mar-teze.) **O teskiñ skrivañ emaint (lizherennoù skrivet war sklentenn ar paotr).**

### 2.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

E Ginea n'eus ket a skolioù-mamm pe nebeut. Ar vugale a rank deskiñ galleg ha deskiñ lenn ha skrivañ war un dro. Abalamour da se e pad ar CP daou vloaz. Ar memes dilhad o deus ar vugale.

## 3. Lennomp ha komprenomp; sellomp

Ar bajenn a-bezh a c'hall bezañ graet er memes koulz.

### 3.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Respontoù da skrivañ war ar c'haier brouilhed.

### 3.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

Goulenn diganto reiñ o respontoù hag arguzenniñ diouzh an ezhomm.

Skrivet e vo ar respontoù mat er c'haier war ar bajenn a-zehoù.

### Lennomp ha komprenomp

- a) Penaos ez a ar skolidi d'ar skol? **War droad ez eont. Lod o deus kalz a gilometroù d'ober (14 km mont-ha-dont).**
- b) Emaoc'h e-touez ar skolidi a zo o chom ar pellañ diouzh ar skol. Da bet eur e rankit kuitaat ho ti diouzh ar mintin evit bezañ e koulz er skol? **Da c'hwec'h eur ha kard diouzh ar mintin.**
- c) Da bet eur e vezoc'h distro d'ar gêr? **Da seizh eur noz, pe da deir eur goude kreisteiz eus miz Meurzh da viz Mezheven.**
- d) Petra a c'hoarvez pa vez re domm an amzer? **Berroc'h e vez an devezhioù skol.**
- e) Pegeit e pad ehan kreisteiz? Perak? **Teir eur e pad rak skolidi zo a zistro d'ar gêr da zebriñ.**

### Sellomp

Sed amañ teir luc'hskeudenn. Unan anezho n'eo ket bet tennet e skol Séfouré. Pehini? Ha perak? Roit un titl da bep hini.

N'eus ket a gantinn e skol Séfouré evit c'hoazh. Neuze eo bet tennet al luc'hskeudenn 2 en ur skol all.

Titloù :

- 1) Er porzh-skol; poent an ehan eo, deomp da c'hoari er porzh-skol!
- 2) Poent debriñ, bugale!
- 3) Eus pelec'h e teu skolidi skol Séfouré?

### 3.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

War droad ez a ar skolidi d'ar skol. Lod anezho o deus kalz a gilometroù d'ober mintin ha noz.

## 4. Klozañ : petra zo bet desket ?

### 4.1. Gerioù da c'houzout (dielfennañ ar c'heriaoueg)

- ♦ Isprefeti
- ♦ Kan broadel

### 4.2. Dalc'homp soñj (sintezenn)

Sevel ar sintezenn gant ar skolidi diwar ar poentoù pennañ bet lakaet war wel. Gallout a rit ouzhpennañ un nebeud titouroù. Amañ ne vo anv nemet eus an tem pennañ : an treuzdougen.

E kumunioù bihan Ginea, n'eus ket a dreuzdougen publik evit kas ar vugale d'ar skol. O zud n'o deus ket a girri-tan\* kennebeut. Mont a ra ar skolidi war o zroad.

\* Er vuhez pemdez e reer muioc'h-mui gant ar ger « karr » evit « karr-tan ». Neuze e c'hall ur c'harr bezañ kaset en-dro gant ur c'heflusker (karr-tan) pe gant loened. En degouezh-mañ e c'hallit resisaat « karr-tan », « kirri-tan » ma fell deoc'h.

Ar pennad « Skrivomp » a c'hall bezañ kemeret evel un doare all da ginnig ar sintezenn : « Gant an titouroù ho peus kavet en testennoù ha war al luc'hskeudennoù, kemerit plas ur skoliad pe ur skoliadez eus ar CM2 ha kontit ho puhez er skol abaoe ar CP. »

## Fichenn 4

# Mont ha dont etre kêrioù e Breizh : skouer BreizhGo

### Palioù danvez

Deskrivañ skeudennoù

Tennañ titouroù diwarno

Ober anaoudegezh gant ar servijoù treuzdouden rannvroel

Ober gant al lec'hienn KorriGo

### Palioù yezh

Kompren dre lenn, dre selaou ► kompren an urzhioù labour

Komz gant unan bennak ► respont d'ar goulennoù

Prezeg ► deskrivañ ur skeudenn

Skrivañ ► skrivañ ur sintezenn eus ar pezh a zo bet desket

### Dafar

- Fichenn 4 : « **Mont ha dont etre kêrioù e Breizh : skouer BreizhGo** »

### Mont en-dro

#### 1. Sellomp ha deskrivomp

##### 1.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Ar strolladoù o do da sellet pizh ouzh an holl luc'hskeudennoù evit respont d'ar goulennoù. Moaien a vo da ouzhpennañ goulennoù diwar-benn al logoioù bihan a gaver war ar c'harr-boutin hag ar yezhoù implijet.

##### 1.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

Goulenn diganto reiñ o respontoù hag arguzenniñ diouzh an ezhomm.

Skrivet e vo ar respontoù mat er c'haier war ar bajenn a-zehoù.

- a) Petra zo boutin etre an holl luc'hskeudennoù-se? **Logo BreizhGo pe logo rannvro Breizh a gaver war an holl.**
- b) Petra eo BreizhGo? **Servij treuzdouden boutin pe foran rannvro Breizh.**
- c) Peseurt doareoù treuzdouden a implij BreizhGo? **Trenioù, kirri-boutin ha bigi.**
- d) Un implij ispisial zo gant kirri-boutin zo. Pehini? **Treuzdouden ar skolidi.**

Gallout a rit lakaat ar gaoz war :

– Al logoioù all a gaver war ar c'hirri-boutin (tud nammet; tud dall; CNG : gant gaz ez eont en-dro; wifi e bourzh; gallout a ra an dud paeañ gant kartennoù-bank).

– Ar yezhoù implijet war an trenioù hag ar c'hirri-boutin : galleg, brezhoneg ha gallaoueg, an teir yezh komzet e Breizh ha degemeret en un doare ofisiel gant rannvro Breizh.

##### 1.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Kaozeal gant ar c'hlasad a-bezh evit gouzout petra zo talvoudus da zalc'her soñj evit displegañ penaos e vev an dud e kêr. BreizhGo eo ar servij treuzdouden foran kaset en-dro gant rannvro Breizh. Implijout a ra trenioù, kirri-boutin ha bigi.

Titouroù ouzhpenn : ar rannvroioù a ra war-dro an treuzdouden foran abaoe 2017 (lezenn NOTRe). A-raok e veze an treuzdouden gant kirri-boutin e karg an departamantoù ha ne oa nemet an THR/TER (Tren Herrek Rannvroel / *Train Express Régional*) dindan ar rannvroioù. Aléop eo anv ar servij treuzdouden foran e rannvro Broioù al Liger (departamant al Liger-Atlantel).

## 2. Implijomp ostilhoù

### 2.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Diouzh ho c'hoant e c'halloc'h leuskel ar skipailhoù da labourat war bep tra (goulennoù ha keñveriañ) pe implijout ar goulennoù a) ha b) a-stroll evit reiñ lañs d'al labour.

a) Petra a c'haller lavaret diwar-benn al linennoù hent-houarn e Breizh? **N'eus linenn hent-houarn ebet o treuziñ kreiz ar vro.**

Gallout a rit mont pelloc'h ha goulenn digant ar skolidi penaos ober neuze. **Ober an dro; kemer kirri-boutin.**

b) Peseurt doareoù treuzdouden ouzhpenn a gaver e lec'hienn KorriGo? Perak? **Bus, metro, tramgarr : evit gallout mont d'ur chomlec'h resis e kêr e ranker kemer unan anezho er gar.**

c) Petra eo ar c'henweturiñ? **Mont gant tud all er memes karr-tan.**

Titouroù ouzhpenn : rannvro Breizh a ginnig al lec'hienn kenweturañ Ouestgo evit en ober.

### Keñveriomp\*

Er fichenn 1 « **Mont ha dont war ar pemdez** » hon eus klasket pet kilometr zo etre kêrioù zo eus Breizh ha pegeit e lakaer evit ober ar beajoù-se gant ur c'harr-tan hiniennel. Greomp kemend-all gant an treuzdouden foran. N'eus lec'h ebet skrivet e linenn ziwezhañ an daolenn : deoc'h da zibab ar veaj ho peus c'hoant d'ober. Evit an holl, skrivit an doareoù treuzdouden a bep seurt ho po da implijout evit pep beaj.

Evit KorriGo : lakait « ti-gar... » ma'z eus unan; an deiz war-lerc'h hag azalek 8 eur vintin.

Evit leuniañ al linenn ziwezhañ e ranko pep skoliad pe pep strollad ober gant *Mappy* pe *ViaMichelin* evit ar c'harr-tan ha KorriGo evit an treuzdouden foran.

|                   | Gant ur c'harr-tan | Gant an treuzdouden foran |
|-------------------|--------------------|---------------------------|
| Brest-Roazhon     | 243 km; 2 eur 33   | Etre 1 eur 58 ha 2 eur 19 |
| Brest-Naoned      | 296 km; 3 eur 11   | Etre 5 eur 16 ha 6 eur 06 |
| Sant-Brieg-Naoned | 204 km; 2 eur 11   | Etre 4 eur 30 ha 5 eur 39 |
| Sant-Maloù-Naoned | 177 km; 2 eur 01   | Etre 4 eur 30 ha 4 eur 38 |
| .....             | .....              | .....                     |

\* Implijit « Rennes », « Nantes », « Saint-Brieuc »... evit ober gant KorriGo.

Evit an treuzdouden foran, lakait ar padelezhioù berrañ ha hirañ hepken. Lakait war wel e c'hall ar veaj bezañ hir pe hiroc'h (TTB/TGV : Tren Tizh Bras; THR/TER : Tren Herrek Rannvroel).

- Brest-Roazhon : diouzh an eur, TTB/TGV pe THR/TER; hep cheñchamant.
- Brest-Naoned : diouzh an eur, karr-boutin > THR/TER; TTB/TGV; TTB/TGV > THR/TER; 2 pe 3 cheñchamant.
- Sant-Brieg-Naoned : diouzh an eur, TTB/TGV > karr-boutin; TTB/TGV > THR/TER; TGV (dre Bariz); 2 cheñchamant.

- Sant-Maloù-Naoned : diouzh an eur, bus > bus > karr-boutin; THR/TER > karr-boutin; THR/TER > THR/TER; 2 pe 3 cheñchamant.

## 2.2. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Kaozeal gant ar c'hlasad a-bezh evit gouzout petra zo talvoudus da zalc'her soñj evit displegañ penaos e vev an dud e kêr. Berroc'h eo ober gant an treuzdouden foran pa'z eer eus un ti-gar d'egile hep cheñchamant. Hir pe hiroc'h e c'hall bezañ pa ranker ober meur a cheñchamant. A-wechoù e ranker ober un hentad kalz hiroc'h eget dre an hent evit ar c'hirri.

## 3. Klozañ : petra zo bet desket ?

### 3.1. Gerioù da c'houzout (dielfennañ ar c'heriaoueg)

Dibab ar gerioù da zalc'her soñj anezho : TTB/TGV, Tren Tizh Bras; THR/TER, Tren Herrek Rannvroel.

### 3.2. Dalc'homp soñj (sintezenn)

Sevel ar sintezenn gant ar skolidi diwar ar poentoù pennañ bet lakaet war wel. Gallout a rit ouzhpennañ un nebeud titouroù.

Pep rannvro he deus d'ober war-dro ar servij treuzdouden foran. Implijet e vez : kirri-boutin, busoù ha THR/TER (Trenioù Herrek Rannvroel). E kêrioù zo e kaver ivez an tramgarr (Brest, Naoned) pe ar metro (Roazhon). Hir pe hiroc'h e c'hall bezañ ur veaj gant an treuzdouden foran.

Notenn : An TTB/TGV a vez implijet e Breizh ivez. Met stag int ouzh rouedad broadel an SNCF (KBHF : Kevredad broadel hentoù-houarn Frañs).

# Mont ha dont etre kêrioù e Frañs

## Palioù danvez

Tennañ titouroù diwar ur grafik, ur gartenn  
Sellet ouzh luc'hskeudennoù ha tennañ titouroù diwarno  
Tennañ titouroù diwar un daolenn  
Anavezout ar modoù treuzdouden tud a bep seurt implijet e Frañs.

## Palioù yezh

Kompren dre lenn, dre selaou ► kompren an urzhioù labour  
Komz gant unan bennak ► respont d'ar goulennoù, kaozeal gant ur skoliad all  
Prezeg ► resteurel an titouroù bet dastumet  
Skriavañ ► skrivañ ur sintezenn eus ar pezh a zo bet desket

## Dafar

- Fichenn 5 : « **Mont ha dont etre kêrioù e Frañs** »

## Mont en-dro

### 1. Komprenomp ur grafik

#### 1.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Ar strolladoù o do da sellet ouzh ar grafik evit respont d'ar goulennoù.

#### 1.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

Goulenn diganto reiñ o respontoù hag arguzenniñ diouzh an ezhommm.

Skrivet e vo ar respontoù mat er c'haier war ar bajenn a-zehoù.

- a) Petra a ziskouez ar grafik-mañ deomp? **Ar modoù a bep seurt implijet gant an dud evit ober monedoneoù.**
- b) Peseurt modoù treuzdouden disheñvel zo meneget? **Karr hiniennel; bus, karr-boutin, tramgarr; tren, metro; karr-nij.**
- c) Pehini a vez implijet ar muiañ? **Ar c'harr hiniennel.**

#### 1.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Kaozeal gant ar c'hlasad a-bezh evit gouzout petra zo talvoudus da zalc'her soñj.

Meur a vod treuzdouden a vez implijet gant an dud (karr hiniennel; bus, karr-boutin, tramgarr; tren, metro; karr-nij). Ar c'harr hiniennel a vez implijet ar muiañ, hag a-bell (84 %).

### 2. Sellomp ouzh ur gartenn

#### 2.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Ar strolladoù o do da sellet ouzh ar gartenn evit respont d'ar goulennoù.

#### 2.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

- a) Petra eo al linennoù mouk hag orañjez war ar gartenn? **Hentoù pennañ Frañs.**

b) Peseurt kemm zo etre al linennoù mouk hag ar re orañjez? **Mouk : ar gourhentoù hag an hentoù-tizh ; orañjez : an hentoù broadel all.**

Notenn : gallout a rit lakaat war wel ez eus karreziou bihan gant ul lizherenn hag un niverenn war an hentoù mouk. Da skouer : N12, A84. Goulenn ganto petra int.

**N : nationale / hent broadel**

**A : autoroute / gourhent**

War ar gartenn hon eus dalc'het al lizherennoù ofisiel N hag A. E brezhoneg e c'haller ober ivez gant « hent broadel 12 » : B12 ; « gourhent 84 » : G84.

c) Peseurt kemm zo etre al linennoù mouk e Breizh hag er peurrest eus Frañs? **E Breizh int hentoù broadel, digoust ; er peurrest eus Frañs int gourhentoù da baeañ.**

Notenn : n'eus netra da welet gant ar gevrat-eured etre Anna Vreizh hag ar roue Charlez VIII e 1491 pe Loeiz XII e 1499. Ur vojenn eo. Ne c'haller ket kaout ur gourhent da baeañ ma ne vez ket un hent broadel digoust o kas d'ar memes lec'h. Pep blenier a c'hall dibab evel-se : paeañ evit mont buanoc'h, pe get. E Breizh e oa bet divizet treuzfurmiñ hentoù broadel zo e hentoù-tizh. Re ger e vije bet sevel gwir c'hourhentoù ouzhpenn.

### 2.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Kaozeal gant ar c'hlasad a-bezh evit gouzout petra zo talvoudus da zalc'her soñj. Gourhentoù ha hentoù broadel zo evit mont eus an eil kêr d'eben.

## 3. Sellomp ouzh al luc'hskeudennoù

### 3.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Ar strolladoù o do da sellet ouzh al luc'hskeudennoù evit respont d'ar goulennoù.

### 3.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi

a) Lakait niverenn an alc'hwez e-kichen al luc'hskeudenn vat.

**1** Panell ditouriñ aerborzh Brest, d'ar 24 a viz Genver 2023. **Panell ditouriñ.**

**2** Tren Etre Kêrioù niv. 3833 etre Naoned ha Bourdel e 2018. **Tren.**

**3** Karr-boutin Flixbus e Lyon e 2016. **Karr-boutin.**

b) Da belec'h e c'halled mont eus aerborzh Brest d'ar 24 a viz Genver 2023? **Pariz, Bourdel, Lyon.**  
Notenn : goulenn digant ar skolidi petra a dalvez « CDG » e-kichen Pariz. **Charles de Gaulle.**

c) E-tro pet eur e oa bet tennet al luc'hskeudenn-se? **Da 11 eur 1 ! evel e vez gwelet e krec'h a-zehoù.**

d) Ur bus-kêr eo? Displegit. **N'eo ket, ur c'harr-boutin a ya eus an eil kêr d'eben : warnañ ez eo skrivet « Bordeaux-Lyon » hag ar priz.**

e) Peseurt kemm zo etre un Tren Etre Kêrioù, un Tren Tizh Bras hag un Tren Herrek Rannvroel, d'ho soñj? **Un Tren Herrek Rannvroel a ya en-dro en ur rannvro resis, Breizh da skouer ; un Tren Tizh Bras a ya fonnus (320 km/e d'ar muiañ pa vez tud e-barzh) war al linennoù tizh bras (LTB) ; un Tren Etre Kêrioù a ya en-dro e Frañs a-bezh, met goustatoc'h (200 km/e d'ar muiañ).**

### 3.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Kaozeal gant ar c'hlasad a-bezh evit gouzout petra zo talvoudus da zalc'her soñj. Ober al liamm etre ar modoù treuzdougen roet er grafik (poent 1) hag ar skouerioù roet er boelladenn-mañ. Graet hon eus anaoudegezh gant ur seurt tren nevez : an Tren Etre Kêrioù (TEK).

## 4. Keñverioimp

### 4.1 Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Ar strolladoù o do da sellet ouzh an daolenn. Deoc'h-c'hwi da hentañ anezho gant un nebeud goulennoù dre gomz pe skrivet war an daolenn. Goulennoù skouer gant o respontoù, amañ dindan (4.2).



## 4.2 Reizhañ al labour gant ar skolidi

a) Peseurt mod treuzdouden a ranker implijout evit mont ar buanañ ar gwellañ eus Brest da Lyon? **Ar c'harr-nij.**

b) Peseurt kudenn zo stag ouzh ar mod treuzdouden-se? **Kalz CO<sub>2</sub> a vez dilaosket en aer pa implijer ar c'harr-nij.**

Notenn : el lec'hienn <https://datagir.ademe.fr> pe en islec'hienn <https://impactco2.fr/transport> e c'haller gouzout pet gramm pe kilogramm CO<sub>2</sub> a vez dilaosket evit kas ur veaj da benn gant ur mod treuzdouden resis. Evel-just e vez skignet gazoù efed ti-gwer all.

c) Peseurt mod treuzdouden eo an ekologelañ? **An Tren Tizh Bras (TTB/TGV).**

d) Penaos ober evit ma teufe ar c'harr hiniennel da vezañ implijet en un doare ekologeloc'h?

– **Gwelloc'h ober gant ur c'harr tredan eget gant ur c'harr termek.**

– **Gwelloc'h bezañ meur a hini er memes karr.** Lakaat war wel e vez kontet an niver a gilioù CO<sub>2</sub> dre zen. Gallout a rit sevel un daolennig : un den, 205 kg CO<sub>2</sub>; daou zen, 102,5 kg CO<sub>2</sub> ... pemp den, 41 kg CO<sub>2</sub>.

## 4.3 Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Kaozeal gant ar c'hlasad a-bezh evit gouzout petra zo talvoudus da zalc'her soñj. Pa'z eer eus an eil lec'h d'egile, nemet ma vefe war droad pe war velo, e vez dilaosket CO<sub>2</sub>. Diouzh ar mod treuzdouden implijet e c'hall bezañ muioc'h (karr-nij, karr hiniennel) pe nebeutoc'h (tren, karr-boutin).

## 5. Klozañ : petra zo bet desket?

### 5.1. Gerioù da c'houzout (dielfennañ ar c'heriaoueg)

Dibab ar gerioù da zalc'her soñj anezho : Tren Etre Kêrioù (TEK); karr tredan; karr termek; gaz efed ti-gwer.

### 5.2. Dalc'homp soñj (sintezenn)

Sevel ar sintezenn gant ar skolidi diwar ar poentoù pennañ bet lakaet war wel. Gallout a rit ouzhpennañ un nebeud titouroù.

Evit mont eus an eil kêr d'eben e c'haller implijout modoù treuzdouden a bep seurt : kirri-nij, tren, kirri-boutin, kirri hiniennel tredan pe termek. Dilaosket e vez CO<sub>2</sub> (ha gazoù efed ti-gwer all) muioc'h pe nebeutoc'h diouzh ar mod treuzdouden implijet.



# Mont d'an estrenvro

## Paliou danvez

Sellet ouzh luc'hskeudennoù ha tennañ titouroù diwarno

Lenn un destenn ha tennañ titouroù diwarni

Ober gant lec'hiennoù Internet evit prientiñ ur veaj : *Mappy* pe *ViaMichelin*; *SNCF Connect*; lec'hiennoù aerborzhioù Breizh

Anavezout ar modoù treuzdougen tud a bep seurt implijet evit mont d'an estrenvro

## Paliou yezh

Kompren dre lenn, dre selaou ► kompren an urzhioù labour

Komz gant unan bennak ► respont d'ar goulennoù, kaozeal gant ur skoliad all

Prezeg ► resteurel an titouroù bet dastumet

Skrivañ ► skrivañ ur sintezenn eus ar pezh a zo bet desket

## Dafar

- Fichenn 6 : « **Mont d'an estrenvro** »

## Mont en-dro

### 1. Lennomp ha komprenomp un destenn

#### 1.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Ar strolladoù o do da lenn an destenn evit respont d'ar goulennoù. Gallout a rit lavaret dezho kemer harp war ar goulennoù-se evit klask ar respontoù en destenn hep na vije ret kompren pep ger pe pep frazenn.

#### 1.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi.

Goulenn diganto reiñ o respontoù hag arguzenniñ diouzh an ezhomm.

Skrivet e vo ar respontoù mat er c'haier war ar bajenn a-zehoù.

a) Eus pelec'h e teu ar pennad kelaouiñ-se? **Eus ar gazetenn *Ya!***

Un digarez eo da c'houlenn digant ar skolidi hag anavezout a reont ar gazetenn-se; petra a ouzont diwar he fenn; daoust hag anavezout a reont kazetennoù all damheñvel; pere?; petra a ouzont diwar o fenn?

b) Peur e oa bet embannet? (Goulennit ur respont resis.) **D'ar 17 a viz Genver 2023 e oa bet embannet.**

c) Petra eo ar Brittany Ferries? **Ur gompagnunezh listri.**

Moaien e vo resisaat :

*Ferry, ferries* (liester) : listri o tougen tud ha kirri. TermOfis : lestr-treizh, listri-treizh.

*Car-ferry* : Termofis : karrlestr, karrlistri.

d) Perak eo bet savet ar pennad-se diwar-benn ar Brittany Ferries? **Hanter-kant vloaz zo e oa bet savet : deiz-ha-bloaz ar gompagnunezh eo.**

e) Da belec'h e c'haller mont gant ar Brittany Ferries? **Da vBro-Saoz, Iwerzhon ha Spagn.**

f) Perak e implij ar Brittany Ferries listri hag a ya en-dro gant GNL? **Evit ober gant listri propoc'h, na saotront ket kement.**

g) Abaoe pegoulz e ra ar Brittany Ferries gant al lestr a weler war al luc'hskeudenn-mañ ? **Abaoe 2022.**

(Ret eo klask anv al lestr en alc'hwez al luc'hskeudenn evit kavout anv al lestr en destenn.)

### 1.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Kaozeal gant ar c'hlasad a-bezh evit gouzout petra zo talvoudus da zalc'her soñj.

E Breizh e kaver ur gompagnunezh listri-treizh evit mont d'an estrenvro : ar Brittany Ferries.

## 2. Klaskomp

Evit reiñ lañs d'al labour e c'haller goulenn digant ar skolidi peseurt kêr a anavezont er roll kinniget. Evit ar re all e c'hallit implijout : kartennoù (Europa, ar bed); geriadurioù gant an anvioù divoutin; Internet. E-kichen pep anv e c'hall ar skolidi skrivañ anv ar vro etre krommelloù.

Goude-se, deoc'h-c'hwi da zibab an doare da gas al labour da benn :

- Dibab ur veaj evit ar c'hlas a-bezh ha lakaat pep strollad da labourat war ul lec'hienn disheñvel.
- Lakaat pep skipailh da labourat war ur veaj resis.

### 2.1. Labourat dre strolladoù 2 pe 3 bugel

Ar strolladoù o do da implijout ul lec'hienn e-touez ar re meneget war ar fichenn. Pouezus eo lakaat pep strollad da loc'hañ kuit eus o zi evit delc'her kont eus ar mod treuzdougen da implijout evit mont betek un ti-gar, un aerborzh... Da bep strollad d'en em soñjal war ar modoù treuzdougen a c'hallont implijout pe get evit dibab al lec'hienn o do ezhomm.

Skouer : loc'hañ kuit eus Brest da vont da zDulenn (Iwerzhon) :

#### **Mappy : gant ur c'harr hiniennel**

Daou hent zo kinniget :

932 km ; 20 eur 12 ; CO<sub>2</sub> : 121 kg.

Karr (betek Rosko) ; lestr (Rosko-Plymouth : 7 e 39) ; karr (betek Fishguard) ; lestr (Fishguard-Rosslare : 4 eur 08) ; karr (betek Dulenn).

681 km ; 22 eur 05 ; CO<sub>2</sub> : 89 kg.

Karr (betek Rosko) ; lestr (Rosko-Rosslare : 18 eur 45) ; karr (betek Dulenn).

#### **Lec'hienn aerborzh Brest**

Gallout a ra ar skolidi furchal el lec'hienn evit gouzout ha gallout a reer mont eus Brest da zDulenn.

E lec'hienn aerborzh Brest, dibab « Destinations directes » ha klask an anv « Dublin ».

Titouroù kavet : e-pad an hañv ; div wech ar sizhun (Meurzh, Sadorn) ; gant ar gompagnunezh Aer Lingus.

Evit mont pelloc'h e c'hall ar skolidi dibab ur veaj resis : « Vols et destinations > Trouver et réserver un vol ». Bez' o do da zibab ur sizhunvezh e-pad an hañv eus ar Meurzh d'ar Meurzh pe eus ar Sadorn d'ar Sadorn.

Ur veaj war-eeun : 1 eur 40 ; CO<sub>2</sub> ? (al lec'hienn ne ro ket an niver a gilioù CO<sub>2</sub> dilaosket).

Ur veaj all kinniget : Brest > CDG > Dulenn ; mont : 11 eur 10 ; distro : 4 eur (mont-dont, CO<sub>2</sub> : 581 kg).

D'ar skolidi da glask petra eo « CDG » (aerborzh Charles de Gaulle, Pariz) ha perak eo ken bras an diforc'h etre padelezh ar mont hag an distro (ret eo gortoz pell pe belloc'h e Pariz).

### 2.2. Reizhañ al labour gant ar skolidi.

Diouzh an dibab enklask ho peus graet e vo disheñvel an titouroù kavet.

### 2.3. Kaozeal evit dibab ar poentoù pennañ

Ma kemeromp skouer Dulenn : daou zoare zo da vont da zDulenn, ar c'harr pe ar c'harr-nij. Gant ar c'harr e rankimp kemer ul lestr-treizh eus Rosko. Hiroc'h e vo ar veaj. Gant ar c'harr-nij e vez berroc'h ar veaj. A-wechoù ne c'haller ket mont war-eeun. Neuze e ranker tremen dre aerborzh Roissy-Charles de Gaulle.

## 3. Klozañ : petra zo bet desket ?

### 3.1. Gerioù da c'houzout (dielfennañ ar c'heriaoueg)

Dibab ar gerioù da zalc'her soñj anezho : lestr-treizh pe karrlestr.

### 3.2. Dalc'homp soñj (sintezenn)

Sevel ar sintezenn gant ar skolidi diwar ar poentoù pennañ bet lakaet war wel. Gallout a rit ouzhpennañ un nebeud titouroù.

Evit mont da veajiñ dre Europa e c'haller implijout : ar c'hirri hiniennel ; an trenioù hag ar c'hirri-nij. Linennoù kirri-boutin zo ivez. E Breizh e c'haller kemer listri-treizh e Rosko pe e Sant-Maloù da vont da lwerzhon pe da Vreizh-Veur. Ingal ne c'haller ket ober ar veaj en un tenn : ret eo cheñch tren pe karr-nij meur a wech. Evit mont pelloc'h dre ar bed a-bezh e ranker tremen an aliesañ dre aerborzh Roissy-Charles de Gaulle, e-kichen Pariz.

War kartenn Breizh e c'haller lakaat ar porzhioù listri-treizh (Rosko, Sant-Maloù) ; an aerborzhioù brasañ : Naoned, Brest, Roazhon, an Oriant, Dinarzh-Pleurestud-Sant-Maloù, Kemper (en urzh).